

FRAJILITE AN DUD IAOUANK

(War eun ton rigolo)

Ni boa eur c'hogik iaouank oa du-man genem-ni,
Oa kommansel da gana, mes brema na ra mui.
Eun nozvez goude e goan, o tont eur zonzj 'n e ben :
Me a renk mont en noz-man, var digare pourmen.

Me renk ober eur bale, eun droyat var ar mez,
Da glask he merc'h Perina digant an intanvez.
Peguir on hanvet kogik gant holl dud ar vro-ma,
Me garfe kaout eur bolez 'vit 'n em zivertissa...

Pa 'm eus tapet an hano a gogik 'vit parlañ,
Vo red d'in kaout parrez da gomans ma mensj.
Perin, merc'h an intanvez bounez a zo d'am grad :
Kanerez ha danserez, brillant he daou lagad.

Bonsoir d'ec'h-hu, intanvez, setu me deut exprez
Da glask ho merc'h Perina da hanter tiegez,
Rag keit ha ma vemp iaouank, or bo kontantamant
Ha plijadur asamblez hep chagrin na tourmant.

Ma merc'h-me zo abredik eur blavez c'hoaz :
Mar de kontant ar bugel, me na ran ket a gaz.
Kousket eo en he guele er pen draon an ti,
Monet a ran d'he c'havel, da c'houlouen diganti.

Arsa, ma merc'h, emezi, na d'in-me leveret
Ha c'houi zo kontant, paourik, de gevot eur pried.
Berroc'h kavfet an amzer breman epad an anv
Ha tom a doc'h ho kuele, goude pa zeui ar goanv.

O ia va mam, emezi, serten me zo kontant
Demeus a greiz ma c'halon da gaout eur pod iaouank.
Mar de kaner ha danser hag eur pod dilikat,
Neuze am eus esperanz d'ober tiegez mad.

Neuze ar pod iaouank-man a zo joaüs ha gie
Hag a zistroas d'ar ger, hed an end 'n eur gane.
Penez eta, Yan Gogik, te zo bet o vale,
Eun tam mout divezat o c'hanons d'omp an de.

Neuze zistroat ouzin gant eun air da c'hoarzin :
Mar de guir on-me kogik, c'houi zo eur louarn fin.
C'houi pefe eur vadelez da vont breman raktal
Da anons ma dimezi betek ar presbital.

Ar c'hoarz var ma muzellou, pa n'on ket vit miret :
Ia va mignon, emezan, me rei ze, na re ket ;
Monet a ran evidoc'h beleg ar presbital
Rag merc'h an intanvez evidoc'h ne ket fal.

Bonjour d'oc'h, o trou person, me a zo deut gant prez
Da c'hout ha c'houi zimefe eur c'hog hag eur bolez
Pere o deus dezir bras da veat uniset ;
Eun tamic a zo dija o deus en em choazet.

Neuze a respontas d'in ive 'n eur vouze'hoarzin :
Deus sman abarz zal, kemer eur bane guin.
Eroët e zout bepred, eun tamik de kevier,
A teus klevet jamez ve dimezet ar yer.

Ezkuzit, aotrou person, mar meus drouk parlatet :
Malheur eo d'an dud iaouank, pere zo lezhanvet.
Ar re a barlanton d'oc'h a zo daou zen iaouank
A zezir be unisset vel diou galon gontant.

Ar re a barlanton d'oc'h zo mal ha fumelen
A zezir bea staget gant ar memez chaden.
Unan ane trivec'h via, an hini all pemzek
Zo pell zo braz en hirvoud, c'hortoz be dimezet.

Ma et d'ar guer ma mignon, lar d'e dont d'an illiz
Ha me ho interrojo var d'arn ar c'hatekis
Pa ergoulet di-rante, a na ouient netra
Demeus ar sakramanchou, ar re brinsipalla.

Filet d'ar guer bugale, evit eur bloa pe daou
Da c'hortoz ma po desket d'arn ar sakramanchou.
Neuze zavas e ziou skoa, me a gred a zonzj
An druez eo emezan, dimezi bugale.

Neuze a zeuont d'ar guer, o daou en eur ouela,
Red ha vo d'eomp emezo, donet d'a studia,
Red ha vo d'eomp studia, koulz an de hag en noz,
Ma nouzomp ket re nevez, ni zisko ar re goz.

Tri pe bevar miz goude a ia an intanvez
Da gaout an aotrou person da lard d'an tol evez
Rag va merc'h zo languissant, eun tammik zo dija
Sul vui avans he c'hlevet ia bepred war velad.

Setu an aotrou person, d'ezi neus lavaret :
Lavarit d'ezo dont c'hoas hag a vont dimezet.
C'houi ha vad daou zen iaouank, a lavar ar person,
Oa neum gonvertissa eb mont d'arn mision.

Ar memez tra ez in bed dimezet hag eureujet,
Gras da vea evruz keit a vont var ar bed,
Bonheur a zeziromp d'e keit a vont er bed-ma
Ha goude pa vont maro, er gloar da jouissa.

FIN

Corentin BOUARD.

Tous droits réservés :

Nicolas ROUZAUT.

CHANSON NEVEZ

Boked an Eured

(War eun ton anavezet)

Kenta Kouplet

Dont a ran da c'houlen iskus diganec'h, kompagnonez,
Evit ma kaniimp eur boked ma vemp oll assamblez,
Mar plij ganec'h dont d'am selaou, en enor d'an daou den
A zo bet eureujet hirie deus taol ar sakramant. [Iaouank

2^e Kouplet

Beza ze eiz de tremenet aboe ma voan avertisset
Na da zont betek ama evit azista an eured,
Pa voa nav eur hanter zonet hag ar vreg iaouank guisket.
Evit mont betek an iliz evit bez eureujet.

3^e Kouplet

Ar paot a enor hag ar plac'h a enor zo en kreiz an ti,
Pa deus groet o c'hompliment, zo prest d'he c'hondui,
Mez homan zo eur plac'h fur, eur plac'h eleuet mat
A deus astennet he fajou evit mont betek he zad.

4^e Kouplet

Rei a ra d'ezan eur briata deus a greiz he c'halon
Pa deus akordet d'ezi e venediksion,
Disrei a ra deus he mam pehini 'n eus he ganet,
A zo bet en risk he buez deus he lakat er bed.

5^e Kouplet

Rei a ra d'ezi eur briata ha dour 'n he daoulagad :
Petra dall diman skuilh daerrou pa renkan ho kuitat
Kar me zo choajet gant Doue vit chanch posision
O tont d'ho kuitat, ma zud kez, ar glac'haret ma c'halon.

6^e Kouplet

Dont a ran da laret adieu da mi, da mam ha ma zad,
Lec'h ma hon bet maget sansoursi hag ive eleuet mad,
Lezet ganen ma liberte dont d'an ebad ha d'an dans,
Mes breman renkan dilezi ma holl akustumans.

7^e Kouplet

Chom a rin gant ma labour ha lezel an dansou-ze,
Me bedo an dud da vont brema da di Doue,
Len evit achui ar zermon deus ar fidelite
A zo entre an diou durzunel ar rest deuz ho buez.

8^e Kouplet

Na pa c'hai barz er ker ma c'hai roët ar boked
Da verc'h hena deuz an ti-man zo hirie eureujet,
Ar verc'h hena deuz an ti-man zo eureujet hirie
Ha neus ket eur plac'h er baros, unan ken fur hag hi.

9^e Kouplet

Pebeuz devez kaer evidoc'h hirie eta, greg iaouank,
Partout dre lec'h ma tremenfet ver d'ec'h obeisant,
Deuz ar parkou hag ar prajou, ve guelet ar zeblant,
Holl a guitafai o labour vit mont d'ho kuelelet, greg iaouank.

10^e Kouplet

Neuze teuo ar varc'hadourien ha gante peb a baner
En neur dorhai ho daoulagad evit ma velfont skler,
Evit guelet an diou familh zo assamblez uniset,
Evit ober anoudegez deuz ar Marc'had a peus gret.

11^e Kouplet

Na pa velon en pesort stard nem larc'h ar vreg iaouank,
Prest a zini dont de regali deuz a sort et deveus c'hoant
Profitet demeus a deman ho vreg iaouank eureujet,
Ar zun-man zo evidoc'h, mes eben-all ne vo ket.

12^e Kouplet

Souhete ran d'ech ar iec'hed, eve prosperite,
Chanj ha bonheur 'n ho menaj hag union entreze.
Mez mar deu ar maro da lakat fin d'o buez,
Souhaitan d'eze chanj paduz en gloar an eternite.

GUILLERMIC.